

— 5 —


Abaoue a zo pevarzek vloaz tremenet : chomet eo an oll dud souezet o velet ar pez a zo tremenet er c'hrinoll-ze e 1882. Nao den devet ; an dans a oa bet ennhi e 1870, e devoa la-keat kass ar Freret kuit !

Marteze ne oa ket great mad kass ar Freret paour-ze kuit var digarez an dans milliget-ze !

SON ANN HINI GOZ

DISKAN :

*Ann hini goz eo va dous,
Ann hini goz eo zur.*



Koulskoude dont da bardonna
Ar iaouanka ve ar vrava.

D'ar foar pa z'ann d'ar C'hastellin,
Va mestres koz a bae d'in guin.

'Vit mont d'ar pardonniou da bell,
Va mestres iaouank zo fidel.

Pa z'ann d'ar foar pe d'ar marc'hat,
Ann hini goz am c'hundu mad.

'N hini iaouank 'deuz braoentez,
C'hoarzin 'ra ouzin aliez.

Goasa pez pa ve red prena,
'Barz n'he godel ne gaver tra !

— 6 —

Ne ve netra 'barz 'n he chakot,
Mes, ruz avad ve he diou chot !

Ann hini goz a renkin kaout ;
Pe n'am bo na kezek, na saout.

Me m'euz ama goall-abadenn,
Tre arc'hant guen ha bleo melen !

C'hoant am boa da gaout koanteri
Hag arc'hant da heul va hini.

Allas ! 'vit doare eo diez
Kaout arc'hant, skiant ha furnez.

Ann hini goz ouzoun zo fur
'N hini iaouank n'eo ket re zur.

Ma zellfenn 'met oc'h ar genet,
'N hini iaouank ve va fried.

Diouz pep troad n'eo mad pep botez ;
Na da bep goaz mad pep maouez.

Setu perak e sellann mad,
A dra garann kalz ann ebat.

Leuriou neve ha pardoniou,
Lak ann dour da zont em ginou.

Kouskoude pa vinn eureujet
Holl ganin vezint dilezet.

Ennho ho diou a gavont faot ;
Mes, va-unan n'oun ket difaot.

Etre bleo melen ha penn glaz,
Oun nec'het braz klask ober c'hoaz.

— 7 —

Ann hini iaouank a zo koant,
Siouaz ! re gar ar guin-ardant !

Rak guelet m'euz bet anezhi,
Eva betek koueza er pri.

Peseurt tiegez rafenn-me,
Gant eur seurt pried hep leve ?

Dizale velfenn va rochet
Etre va divesker skoulmet !

Ha c'hoaz m'am befe bugale,
E ve tristoc'h kalz va doare !

Al laou o virvi varnezho,
Verfenn, hag hi ve c'hoaz mezo

Kenavo did koz plac'h iaouank
P'en em dolez dija er fank !

Pa'z out n'em roet da vesvi,
Birviken vezi va hini.

Tosta ama va hini goz,
Ma raimp hon daou eur pennad kaoz.

Roet m'euz he zac'h d'ar vesvierez,
Bretra m'oc'h hoc'h eun va mestrez.

« Te den iaouank zo meurbed fur
« Hon daou ni vo n'hor plijadur.

« Mad tre, peuz gret rei he fakad,
« D'ar strinkell-ze, n'oa ket d'id mad.

« Mesvi a ra, skanv ioa a benn
« Ober 'raje eul loudourenn.

— 8 —

« Doue, den iaouank ni garo,
 « Hag euruz hon daou ni vevo. »

Dilezel 'ran hostaleri,
 Evit plijout d'e-hoc'h-c'hu Mari.

Dreist pep tra 'barz va ziegez,
 M'ho karo gant guir garantez.

Iaouank 'peuz guelet ac'hanon,
 'Vechou o c'hoari va lampon.

Mes, brema pa vint demezet,
 Ganeoc'h me vevo 'vel m'eo gleet.

Digant Doue ma doussik koz,
 Hon daou c'houllimp he varados.

Ha da c'hortoz tol ar maro.
 'Vel daou gristen ni a gano :

*Ann hini goz eo va dous,
 Ann hini goz eo zur !*

(Tous droits réservés).

E ti Jean-Pierre GOURLAY, ru ar Brovidans, n° 19.

Kemper, moullet e ti Ar. de KERANGAL.